

106

Da Zoue

Evit supplicha e Vajeste divin da lagat fin d'an amzer rust ha criz
a ren, ha da accordi deomp un amzer favorabl evit madou an douar.

(22, suite)

Var ton Gierz ar Guernez.

Grouer an ên hac an douar,
Hor zelaouit en hor glac'har :
Accordit deomp, ni ho suppli,
Eur fin d'an amzer rust ha cri. (23)

Ar fleur, ar frouez er jardinou,
Ar plant, ar guez er forestou ;
Brasder ar môr hac an douar,
Zo prevennou demeus ho pouvoar.

Hon douarou zo dizec'het,
En defot a c'hlae beniquet ;
Deoc'h, Autrou, hoy eus recours :
Deurvezit donet d'hoj sicour.

Repos an natur er gouân,
Eur mintinvez caer eus an hân ;
Tomder buezec ar c'kreiz-de,
Repos douç abardoes ive.

C'houi zo gür Dad d'ar gristenien :
Sicourit ho crouadurien ;
Protecteur oc'h d'ar maleurus :
Bezjit evidomp generus.

Unz qer parfet a bep sêzon,
Eus ho calloud zo test gürion ;
C'houi lavar d'ar môr en frouden :
Arrêt !... ha ractal na flach qen.

An col, all loar, an oll stered,
Oc'h eus formet evit ar bed ;
An dezer douç, an oll fleurion,
Eus ho madelez zo testou.

Tranquilité an nôsverzion,
Structeur qer parfet hor c'horfou,
Donêzon caer hor pemp sqiant
Zo testou ez oc'h oll-buissant.

An hedou en hor parqeyer,
Goarionigou hor prajeyer,
Al lapouisset, dre o c'haniou,
Ar pesqet er fonç ar moriou.

Plijadur eur vuez divlam,
Eur c'housqet tranquil ha dinam,
Ar joa eus un difun constant,
Douçder mignoniach constant. (25)

An avelic-douç a greiz-de,
Frescadur an amzer-neve,
En amzer an east an domder,
Danvez bras an nevez-amzer. (24)

Eur gundu bur, eur yec'het mad,
A ra ar bonneur e neb stad ;
An unvanez en tieguez,
Eus eur mignon ar vadelez.

ploment oll a zo endro deomp,
 Hac a zo caret mad ganeomp,
 Hov tad, hor mam, hor breur, hor c'hoar,
 Hor pried, hor buquel hor c'har.

An boued a bini e revomp,
 An ear vad fini a zantomp
 Zo oll preuvennou da james
 Evidomp eus ho madelez.

An oll dud oc'h eus bet crouet,
 O deus e peb feçon rentet
 Homdach d'ho qer divent brasder,
 E peb lec'h hac e peb amzer.

(26) Mes ni pere zo qen eürus
 Da adori ho mab Jesus;
 Ni pere zo qiür qristenien
 Hac a vezo da virriqen.

Ni deu, eus a fonç hor c'halon,
 D'eq em strinca ouz treid ho tron,
 Da implori ho madelez
 Evidomp oll, pec'herien qez.

Sellit hon draounien a vizer,
 Dizec'het gant ar goal amzer;
 Hor zicourit dre ho fuissanç;
 Ennoc'h e mäs hon esperanç.

C'houi eo hor Mestr, c'houi eo hon Tad;
 C'houi voe atao evidomp mad:
 Crouer souverez eus ar bed,
 Misericord deomp, ni ho ped!

Leqit tevel, ni ho suppli,
 Ar zec'hor treud, an avel cri;
 Bet truez ouz hor c'halonad,
 Oc'h accordi deomp amzer vad.

N'hon eus mui nemet kirvoudou

Ha glac'har eq hor c'halonou:
 Autrou Jesus! Salver ar bed,
 (27) Misericord deomp, ni ho ped!

Sellit ouz ho fugale qez
 Gant eul lagad a vadelez;
 O oll esperanç zo ennoc'h:
 Ra vezint sellaouet ganeoc'h.

Ni dreist oll, Breizis christenien
 Qer ferm atao eq hor c'hreden,
 Eq em unanomp da bedi
 Jesus hac ar Ver'hez Vari.

Harpet var hon religion,
 Zo engravet eq hor c'halon,
 Doue n'hon abandono qet,
 Mar er pedomp gant feiz parfet.

Sonjomp e zeo dre ar beden,
 Dre œuvrou mad, dre aluzen,
 E plijomp mui da Zoue,
 Hor c'hrouer, hor mestr, hon Roue.

Mar er pedomp gant qiür atqet,
 E vo hor goulen autreet;
 Rac se eta bezomp fisianç:
 (28) Lacomp ennan hon esperanç.

N'eq em abandonomp james
 D'an despit, d'ar qiüevadurez;
 Doue misericordius
 Zo atao ouzomp truezus.

Rentomp bepret enor ha gloar
 D'an Drindet sac, var an douar;
 Melodi d'an Tad Eternel,
 D'ar Mab, ha d'ar Speret-Santel.

Ha c'houi, Mari, mam Iruzez,
 Sellit ouz hor stat maleürus:

168

Obtenit ouz ho Mab divin
Ma vo d'ar goal amzer peurfin.

10 Mae 1844. A. Lédan.

(Vol. VII, p. 22-28.)
29 str. numérotées.

cf. plus bas p. 250-251.